

Fañchig Kouer

Meurzh
2022

Ar gelaouenn bedagogel evit ar re yaouank 7-11 vloaz

Istor ar yaourt,
un dibenn-pred
dispar !




Pajenn 2
**Eus pelec'h e
teu al laezh ?**

Pajenn 3
**Penaos e vez aozet
yaourt ?**

Eus pelec'h e teu al laezh ?

Gant bronneged e vez graet laezh. Laezh a bep seurt a zebromp, laezh buoc'h evit ar pep brasañ, ha laezh gavr, dañvadez pe azenez zoken.

E Frañs e vez produet laezh e 51 600 a feurmioù. Gant 60 buoc'h well-wazh e pep feurm eo 24 miliard a litradoù laezh a vez dastumet bep bloaz e Frañs.




Ha gouzout a raes ?

Un den eus Frañs a ev 50 litrad laezh bep bloaz well-wazh !

Tost 1500 produ zo boued-laezh.

Ar braz eus al laezh e Frañs a vez treuzfurmet e 720 labouradeg.



Demat deoc'h, Fañchiged Kouerien, ma anv zo Albane !

25 bloaz on ha bloaz zo on labourerez-douar.

Em feurm ez eus buoc'hed, 110 anezho kement ha bezañ resis.

Pep a anv-bihan o deus. **BLEUNIENN, DUENN, BSKORN, RIHANNA** ... ac'hanta ya, gallout a reer kemer ebat o sevel loened !

Bep mintin ha bep nozeg an da c'horro ma saout, setu ar mare a blij ar muiañ din, pa c'hallan gwelet ha mont a reont mat, komz outo, ober hillig dezho, kanañ tonioù dezho ivez..


Ober a ran war-dro al leueoù bihan ivez. Er mare-mañ e rankan reiñ da evañ da 20 anezho mintin ha noz. Lod a zeu a-benn drezgo o-unan, lod all o deus ezhomm un tamm sikour c'hoazh.

Ha dres, gouzout a raes eo abalamour d'o leueoù e c'hall ar saout reiñ laezh ?

Ar vuoc'h a ro laezh p'he dez ganet he leue. Evel ma lavarar e vez en he barr laezh !



Du-mañ e produomp **2900 LITRAD LAEZH BEMDEZ**, peadra d'ober yaourtoù neketa !






GOUZOUT PEP TRA GANT JUL HA LENA

Penaos e vez aozet yaourt ?





Pet buoc'h a vez en un tropellad saout-laezh well-wazh, e Frañs ?

60 500 1000

Dibab ar respont mat



Petra a c'haller ober gant laezh ?

- Yaourt
- Fourmaj
- Soubenn
- Amann

Dibab ar respontoù mat




Evit distrujañ ar mikrob a c'hallfe bezañ e vez tommet al laezh e 95°C, petra a reer eus se ?


- Pasteurekadur
- Einsteinekadur
- Newtonekadur

Dibab ar respont mat

Milendall



Sikour Jul da adkavout ar produ aozet gant laezh !



English exercise

Liamm ar gerioù brezhonek ouzh o zroidigezh e saozneg



Laezh

Cow



Dienn

Milk




Laezherezh

Cream



Buoc'h

Milk factory



Skridaozañ : Labourerien-douar yaouank Breizh

Empennañ : Labourerien-douar Breizh, Newsens / Troidigezh : Ofis publik ar brezhoneg.

Kredadoù skeudenniñ ha luc'hskeudenniñ : Labourerien-douar yaouank Breizh, Newsens, Istock, Pixabay.

Pep gwir miret strizh. Difennet eo eiladuriñ hag implijout anez emglev.

Evit skignañ pe implijout, mont e darempred gant : contact@ja.bzh